

Perrot Y.V. : E-tal ar poull

Notenn : N'eus ano ebed war golo ar skrid orin. Sañset e vefe bet skrivet ar pezh-se gand Yann-Vari Perrot. Souezuz-kenañ eo e vefe bet savet gand eur beleg. N'eus forz penaoz, bremañ e vefe sellet fall-spontuz ouz ar mennoziou-ze gand an oll dud.

E-tal ar poull a zo bet c'hoariet, evid ar wech kenta, e Bleun-Brug Lezneven, d'ar 5 a viz Gwengolo 1928. Job Pronost a ree Jalm, M.A. Roudaut Jadel, ha R. Kersebet Jaketa

E-tal ar Poull

C'hoarierien

Jalm, eun ozah yaouank

Jabel, e vaouez

Jaketa, e vamm-gaer

An traou a dremen e-tal poull eun tiegez bihan, war ar mêz.

I Diviz

Jalm

(*E-unan*). Ma n'eo ket eun druez ! Nann, n'on ket evid chom ken en ti d'o zelaou ; bouzaret on ganto ; dond a rankan er-mêz. Red eo ma vije bet an diaoul e-unan oh ober ar jubenn p'on deuet amañ da vab-kaer. An ti-mañ a zo eun ivern nevez ; ne vez ennañ bemdez nemed youherez ha malloziou, tan ha kruun ; ne glevan ken e-doug an deiz, pe gand va mamm-gaer, pe gand va gwreg, nemed : « Jalm, en tu-mañ, Jalm, en tu-hont, n'e-peus ket greet an dra-mañ ? N'e-peus ket greet an dra-hont ? »

Pa vez unan o youhal, e vez eben o fraoñval ; pa vez unan o vallozi, e vez eben o skei. Heñvelloh int ouz diou ziaoulez eged ouz diou vaouez.

A ! A ! eun torr-penn. Kaer em-bevez klask tremen diouto, e vezan braeet ganto.

O ! med n'on ket evid padoud ken hag en eun doare pe zoare e rankan dond a-benn anezo, rag an dra-mañ n'eo ket buheziou eo. Mestr e vin em zi, hag e vin, pe n'eo ket pemp biz eo a zo ouz va dorn.

II Diviz

Jalm, Jabel, ha Jaketa

Jabel

Petra ? peoh a rooh ?

Jalm

Dizale 'ta, n'em-bo urz da lavared ger ebed ken ganeoh-c'hwi, nag en ti, nag er-mêz ? Petra 'zo a-nevez adarre 'ta ?

Jabel

E vije gwelloc'h deoh en em lakaad da labourad eged chom d'en em glemm dre aze, ha d'or stroba, evel ma rit. C'hwi 'gav deoh e vo gellet kaoud bara da zebri o chom da vantri, en doare-ze ?

Jaketa

Ahanta, morjin, dond a reoh ennoh hoh-unan, pelloc'h ? Ar gwaz a dle senti ouz e wreg. Taolit evez, Jalm, n'ho-pefe fest ar vaz, a-raog an noz, ma n'her grit ket !

Jalm

N'eo ket taoliou teod hepken 'ta, eo a bakin, 'm-eus aon ; taoliou baz am-bo ivez, war ar marhad. O ! med gweled e vo greet.

Jaketa

Sell 'ta ! Sell 'ta ! Ha n'eo ket dleet, marteze ? Daoust ha n'eo ket eun dra vad e teufe ar vaouez, pa vez ezomm, da gastiza eun tamm he gwaz, evid degas gwellaenn ennañ.

N'eo ket dre gas, med dre garantez outañ eo e ra an dra-ze, p'her gra. Ar pezh a hourhemenn ho maouez a rankit da ober, Jalm, a ze n'eus ket da dorta.

Jalm

Ya ! Ya ! Va mamm, hen ober a-walh a rafen, marteze, med re, en oll, a hourhemennou a ra din evel-se.

Jaketa

Mad, en aon n'o ankounac'hafeh, gwella ho-peus da ober eo o skriva war baper hag ober eur rollad anezo a gasoh ganeoh dre ma'z eoh.

Jalm

En taol-mañ, a gav din, ho-peus komzet mad ha mond a ran da ober, diohtu, evel ma livirit.

Jabel

(O rei he urziou). Ha gand a reoh, skrivit, sklêr, ho paper, ma vo êz da lenn. Lakit da genta e sentoh ouzin atao, ha war ar ger, hag heb enebi morse.

Jalm

Satordallig ! Ha ma houlennfeh ouzin ober traou diskiant.

Jabel

Peoh, a lavaran. Skrivit e savoh bemdez da genta da ober al labour.

Jalm

(O teurel e bluenn war an daol). A ! mil gutez, ne skrivin ket an dra-ze, avad. Me ? Sevel da genta ?

Jabel

Da aoza lein.

Jalm

Da aoza lein ? E peleh ho-peus gwelet ar hiz-se ?

Jabel

Pe ema e leh all, pe n'ema ket, evid amañ e vo, rag me 'fell din.
(*Jalm a chom heb skriva*).

Jaketa

Skrivit 'ta dillo !

Jabel

Ahanta ? Petra 'hedit ?

Jalm

O skriva va ger kenta emañ c'hoaz, kement a vres hag a drouz a zo ganeoh.

Jaketa

En noz, ma tihun an hini bihan evel ma tegouez aliez, e rankoh sevel, diohtu krenn, d'e luskad, ha ma leñv, e gemeroh war ho tivreh hag e reoh tro ar gambr gantañ, en eur gana, ha goude ma vije hanternoz.

Jalm

N'em-bo ket kalz a blijadur oh ober an dra-ze.

Jabel

Estreged ar pezh a vez plijadur oh ober e ranker da ober. Skrivit hen eta !

Jalm

Leun-tenn eo va faper. E pe leh e kav deoh e skrivfen ken ?

Jabel

Grit dillo pe e tapoh ar wialenn.

Jalm

(*Ken habask ha tra*). Mad, neuze 'ta e rankan skriva en tu all.

Jaketa

Goude-ze e rankoh tamouezad, lakaad an toaz e go, ober tan er forn.

Jabel

Mond d'ar poull, gwalhi an dillad, ober liziou, redeg ar c'houëz.

Jaketa

Mond a-hont, dond amañ, redeg a-gleiz hag a-zehou ha poania evel an droug-spered.

Jabel

Terri an toaz, e gas din d'an ti-forn ha diwall na vefe panenn pe suillet ar bara.

Jaketa

Kas an arreval d'ar vilin, ribotad, sila ar yod.

Jabel

Ha ma n'ho-peus ket a hoant da veza kannet, ficha ar gweleou, kerkent ha gouloudeiz.

Jaketa

Lakaad ar pod war an tan ha skuba an ti.

Jalm

(Torret e benn outañ e laka e zaou zorn war e zaoulagad). Asa ! Asa ! penaoz e kav deoh e vefen gouest da skriva kemend-all a draou ? Komz a rit ho-tiou en eur bern ! Livirit ar pez ho-peus da lavared an eil goude eben.

Jaketa

O lavared edon eta ho-po an toaz da lakaad e go.

Jabel

Ha goude p'ho-po goret ar forn, lakaad an toaz e-barz.

Jaketa

Ha teurel evez mad ne vefe panenn pe suillet ar bara.

Jabel

Gwaska ar c'houëz.

Jaketa

Gwalhi.

Jalm

Gwalhi petra ?

Jaketa

Al loaiou hag ar skudellou.

Jalm

Goustad : al loaiou hg ar skudellou.

Jabel

An darbod hag ar podeziou.

Jalm

Penaoz e kav deoh e hellin-me derhel soñj euz a gemend-all a draou ?

Jabel

Gwalhi oll listri ar gegin, en eur ger, heb ankounac'haad hini pe ho-po da ziwall ouzin.

Jalm

C'hwi 'zo gouestoh egedon-me da walhi traou evel-se !

Jabel

Peoh ! Mond a reoh d'ar poull gand lienennou fank ar paotr bihan.

Jalm

Ken doñjeruz eo ar ger hag an dra.

Jabel

Skrivit hen, evelato, amboubal. An Aotrou-mañ dizale a gemero doñjer ouz pep tra.

Jalm

Livirit ar pez a geroh, evidon-me, m'hen tou, ne walhin ket al lienennou-ze. Eo, moavad sur !

Jabel

Hen ober a reoh, dre gaer pe dre heg. Ma n'her grit ket e vezoh lopet ken e houlennoh dour da eva.

Jalm

A ! mad ! Lakom her grafen neuze ma vo peoh en toull-mañ, pelloh, satordallig.

Jabel

N'ho-pezo netra ken da ober goude-ze nemed lakaad eun tammig urz en ti, a-raog mond d'ho labour all, er-mêz. Bremaig am sikourot da waska ar bern liñseliou-ze ma vezint lakaet da zeha ; skrivit.

Jalm

Mad eo. Med, va Doue, penaoz e teuin a-benn da zanailla kemend-all a draou em spered ? Noz-deiz e rankin beza o teski va hentel.

Jaketa

Hastit, afo, sina ar paper-ze.

Jalm

A ! mad, greet e vezo, med taolit evez na vefe kollet, rag me houlenñ beza krouget a-bouez va zeod ma ran tra pe dra en tu all d'ar pez a zo merket warnañ.

Jaketa

Mad a reoh beza den d'ho ker.

Jabel

Diwar hizio e vo peoh en ti-mañ, pelloh, a-drugarez Doue.
(*Ar vamm a ya kuit*).

III Diviz

Jalm ha Jabel

Jabel

(*Harp er poull*). Sellit, Jalm, krogit e penn al liñsel-mañ, ma vo gwasket. Bezit dineh ; a-benn ma vo peurwasket ar bern dillad-se e vo ruillet dour diouzoh.

Jalm

Petra livirit ? N'ouzon ket petra ho-peus c'hoant da ober.

Jabel

Me 'lavar deoh rei an dorn din da waska ar bern dillad-mañ. Petra ? Red e vo din kemered baz ar yod da zsitanka ho skouarn deoh, gravazeg ?

Jalm

(*O selled ouz e baper*). An dra-ze n'ema ket war va faper.

Jabel

Neuze 'ta ?

Jalm

Nann, nann, pa lavaran deoh.

Jabel

N'ema ket ? Sellit aze 'ta, neuze !

Jalm

Gwir eo ! A ! mad, neuze, bahad dezi. Eur wech all n'hen ankounac'hain ket.

Jabel

Sellit, krogit er penn-ze, ha sachit ; sachit ganeoh avad ha n'eo ket ober an neuz da ober eo !

Jalm

N'eus ket kalz a houëz al lore, da vihanna, gand al liñseliou-mañ ! Sellit amañ. Eur vicher avad ha n'eo tamm ebed diouz ma doare !

Jabel

Peoh, ha bezit a-zevri gand ho labour. Sachit 'ta, pe bremaig me a stlapo al liñsel-mañ deoh ouz ho penn.

Jalm

N'ho-po ket ar galon evelato da ober kemend-all.

Jabel

Nann ! Sellit ! C'houesiit hi bremañ neuze 'ta, penndolog.
(*Hag e stlap al liñsel ouz e benn*).

Jalm

Petra 'rit, paour-kêz maouez ! Bremañ oh gwelloh avad. Setu aze on lakaet gleb dour teil ganeoh.

Jabel

Roit peoh, ha sachit mort, ha sachit avad.

Jalm

(*Droug ennañ e ra eur frap krenn ; e wreg a ziskrog euz al liñsel, a ra eur gammed a re a-dreñv hag a gouez er poull*).

Jabel

O va Doue ! O va Doue ! Petra ho-peus greet, Jalm. Deuit 'ta buan da rei an dorn din da zevel ahann.

Jalm

An dra-ze n'ema ket war va faper.

Jabel

O ! me 'gav din eo torret va garr ouzin ; en dour emeon beteg va hazeliou. Deuit 'ta buan. Beuzet e vin c'hoaz amañ ma ne girit diwall.

Jalm

Krogit er vein ha lammit er-mêz.

Jabel

N'on ket gouest da fiñval gand ar boan a zo em garr. An dour a zo yen-skorn. Emaon o vond da goll va anaoudegez. Aiou ! aiou ! Roit din ho torn 'ta.

Jalm

An dra-ze n'ema ket war va faper. Me a raio ar pezh a zo skrivet ha netra ebed muioh.

Jabel

O ! Piou am zenno ahann da vihanna ? Nemed an Ankou her grafe ?

Jalm

(*Jalm a lenn e baper*). Lakaad an toaz e go ; gwalhi ; tamouezad ; ribotad : ober ar c'houëz.

Jabel

Skorna a ra va izili. Ma n'am zennit ket ahann emañ maro a-raog nemeur emañ.

Jalm

(*O lenn*). Mond a-hont ha dond emañ ; redeg a-gleiz hag a-zehou.

Jabel

O ! Ne welin ket an noz.

Jalm

Terri an toaz, ober tan er forn.

Jabel

Astennit ho torn din 'ta ! Dare on da vervel.

Jalm

Kas an arreval d'ar vilin.

Jabel

N'ho-pesu kalon ebed, Jalm : eur mên a zo en ho kreiz.

Jalm

Ober ar gweleou kerkent ha goulou-deiz.

Jabel

C'hwi 'gav deoh moarvad eo brao beza emañ !

Jalm

Lakaad ar pod war an tan.

Jabel

E peleh emañ va mamm da vihanna ? Va mamm ?

Jalm

Skuba an ti.

Jabel

It da lavared d'an Aotrou Person dond d'am noui.

Jalm

Lennet em-eus va faper tu ha tu hag euz an eil penn d'egile, ha n'eo merket e neb leh em-befe ezomm da ober ar pezh a houlennit aze.

Jabel

Perag neuze n'hoh-euz ket her merket ?

Jalm

Perag hoh-unan n'ho-peus ket hen lavaret ? En em zachtit alese evel ma keroh ; n'eo ket me eo am-eus ho taolet er poull, med n'eo ket me kennebeud eo an hini ho tenno er-mêz.

Jabel

Sellit da weled ha n'eus ket unan bennag o tond war an hent madelusoh egedoh ?

Jalm

An dra-ze kennebeud n'ema ket war va faper.

Jabel

Roit din ho torn 'ta, en ano Doue, va mignon, rag n'on ket gouest da zével ahann va-unan, pa lavaran deoh.

Jalm

Va mignon, me ? Ya, ho kwasa enebour. Evidon, me a garfe e vefeh maro, ma vo peoh diouzoh pelloh.

IV Diviz

Jaketa - Jalm - Jabel

Jaketa

(*Euz an ti*). Petra 'zo ? Petra a zo a-nevez adarre 'ta ?

Jalm

Piou a zeu ?

Jaketa

Klevet em-eus va gervel hag on deuet da weled petra 'oa.

Jalm

An traou a ya mad a-walh peogwir eo maro va gwreg, ar pezh m'edon o hed al pell a oa. Bremañ e vo peoh da vihanna.

Jaketa

Lazet ho-peus va merh ? Torfetour !

Jalm

(*Ken sioul ha tra*). Nann ! en em veuzet eo o koueza war he fenn er poull.

Jaketa

O ! pezh divergont ahanout ! Petar 'peus greet ?

Jalm

Ra'z aio heh ene gand an Aotrou Doue ha ra zeuio an diaoul da derri he fenn outi gand e zent.

Jaketa

O ! va Doue, va merh paour a zo maro !

Jalm

Diskregi he-deus greet diouz al liñsel edom o waska hag eo kouezet war gwenn he hrohen er poull.

Jabel

O ! va mamm, emañ maro ma n'am zennit ket raktal ahann.

Jaketa

Jalm, roit din an dorn 'ta, d'he zenna er-mêz.

Jalm

N'ema ket war va faper.

Jaketa

N'ho-peus ket a vez ?

Jabel

Grit dillo 'ta !

Jaketa

Pebez gwaz digalon ! He lezel a ray da vervel er poull-dour-ze.

Jalm

Ma n'eus nemedon-me d'he zenna ahalese, e chomo e-barz, rag ne fell ket din mond da vevel ganti.

Jabel

Va zikourit en ano Doue !

Jalm

N'ema ket war va faper. Kaer am-eus klask n'her havan e neb leh.

Jaketa

Asa ! Asa ! Jalm, ro peoh en ano Doue, gand ar hoz tamm paper daonet-se, ha ro din an dorn d'he zenna euz ar poull-mañ dillo.

Jalm

Ya ! gand ma roio he ger din e vezin hiviziken ar mestr em zi, med a-hend-all n'eus netra ebed da hedall diouzin.

Jabel

Ma'm zennit ahann, e roin va ger deoh, a galon vad.

Jalm

E gwir ?

Jabel

Ker gwir ha ma'z eus pemp biz ouz va dorn. Me 'raio an oll labouriou en ti heb goulenn netra diganeoh, nemed red-mad e vefe din ober.

Jalm

Mad, ma'z a an traou evel-se hiviziken eo koulz din he zenna euz ar poull, evelato ! Med taolit evez mad ne zalhfeh ket d'ho ker.

Jabel

Ne enebin ket ouzoh gwech ebed ken, lavaret eo.

Jalm

Hiviziken e vezin ar mestr en ti, peogwir va gwreg heh-unan a zento ouzin.

Jaketa

En eun tiegez el leh ma n'eus ket a emgleo ez a ar stal da stalig hag ar stalig da netra.

Jalm

Ha bremañ, merhed, n'it ket d'hen ankounac'haad. Ar vaouez a glask lakaad he gwaz - ha goude ma vefe diskianta den a zo o vale - da vevel dindanni he-devez tro atao da gaoud keuz abred pe ziwezad.

Jabel

Tapet on bet, med ne vin ket tapet ken ! Azaleg hizio me eo a raio oll labouriou an ti ha c'hwi oll labouriou ar mêz. C'hwi a vezo da genta ha me da eil hag en hent-se e vezin em reñk.

Jalm

Pegen brao e vo beva amañ hiviziken. Ma talhom d'or ger an eil hag egile. Na laouen e vezin ha dibreder !

Jabel

Laouen ha dibreder ! Ya ! ya ! laouen ha dibreder e helloh beza ha n'eo ket re abred. Ar vuhez on-eus renet betek-henn n'oa ket eur vuhez 'oa ! Hiviziken c'hwi a vezo ar mestr... hag ar mestr e vezoh pa lavaran deoh.

Jalm

Hag ar mestr-se a vezo hegarad hag eur blijadur e vezo senti outañ. Med, m'hen lavar deoh, amañ, kenetrezom, ar voaz fall ho-poa kemeret da gaoud war eun dro lostenn ha bragez, he-doa lakaet va fenn da drei war an tu eneb.